

Disheñvel eo hep mar ebet temzpered an Emsav se diouzh hini ar ragvrezel. Un dra ret eo, ha kriz evit ar re henañ. Ret, dre ma tro ar bed war un dro gant an eurioù. Traoù a vez graet bremañ hag o devije seblantet dispac'hel dre o zaerded un ugent vloaz 'zo.

Met daoust hag e soñj an hini a gan a bouezh penn ar "Vro Gozh", pe a zoug uhel ar banniel gwenn ha du e penn e gevrenn, er pezh emañ oc'h ober? Arabat disoñjal na c'houlenn ar gouarnamant gall netra all nemet blotadur "breinadur" ar speredoù. Plijout a ray dezhañ hor c'hlevout o kanañ ar Vro Gozh kement ha ma karimp, gant ma chomimp sioul. Ur seurt tra a vez anvet opiom. Aotreet eo bet dimp a c'hrad vat ar c'helc'hioù keltiek. Ha dav dezhi! Lezomp 'ta hor Bretoned vat da skuizhañ gant korolloù brav. Goude se e kouskint brav. Keit ha m'en devo ar mabig ur c'hoariell, ne leñvo ket hag e vo sioul pep tra.

Ne ran ket fae war ar folklor. Met folklor pep bro n'hell bezañ komprenet nemet goude bezañ komprenet ar vro hec'h unan. Hag adal ar poent-se, n'heller ket henvel se folklor, da lavarout eo un diskouezadeg livet evit touristed an hañv. Met a-du emañ gant paotred ar c'helc'hioù a lavar n'eus ket nemet korolloù ha dilhadoù brav e Breizh. Nag iskisat tra, ez eus c'hoazh e Breizh Breizhiz o vevañ c'hoazh!

N'eus nemet gwelout levezon don o deus bet un dornadig tud en istor pep broad dre o fersonelezh hec'h-unan - zoken ma vez ankounac'haet bremañ o oberenn- An dud-se na oant ket alies speredekoc'h eget ar re all. N'o deus ket bet atav mennozioù dreist. Fazioù o deus graet. Met n'o deus ket graet fazioù e-kenver o c'houstiañs, o c'hallonegezh, an onestiz. Ha war betra 'ta e c'hellfemp kontañ, nemet war an dud se, ken dibourvez e vez an Emsav, hep arc'hant, hep galloud, hep brud?

Ur gudenn a vuhez eo kudenn Breizh. Ker e koust da ziskoulmañ. Ret eo dilezel kement a draoù. Goude ar brezel divezhañ, un dornadig tud o deus dalc'het da stourm. Kalz a re all a zo deut endro e-barzh ar werin. Ur forn a yelo dioutañ youloù kreñv evel dir eo bet ar c'hleuz toullet en Emsav gant ar brezel. Ar vuhez n'eo ket un dra aes a ziskoulmer gant ekonomiezh pe politikerezh. Sur a-walc'h n'heller ket bezañ mailhed war bep tachenn, p'hon eus pep tra d'ober. Ne ra forzh, gant ma vimp difrailh ha "klok" war hini ar galon hag an denelezh.

Bez eo bet lavaret ez eus bremañ en Emsav un disrann, grevusoc'h hep mar eget hini an doare-skrivan. Ar re gozh na gomprenont ken ar re yaouank. Ar brezel en devo graet un troc'h e renkadoù an Emsaverien. Ret e oa un ehan. Un ehan evit kavout tud nevez, ha mennozioù nevez, un ehan evit ankounac'haat an tabutoù kozh. A-benn ar fin, muioc'h a vad hon eus da dennañ diouzh ur seurt disrann. Met an hevelep pal a chom atav dirazomp da dizhout.

Kaer e c'hell seblantout divizout diwarbenn an Emsav pa n'eus ket anezhañ e gwirionez, a lavaro darn. Abaoe pevar c'hantved ez eus bet bepred er c'hontrol un Emsav bev e Breizh. Aner eo klask ennañ un hengoun politikel bennak, pe un unvaniezh etre e izili. Ur strouezh a vennozioù, a dabutoù, a envorenoù, a gelaouennoù a gaver kentoc'h. Amañ emañ burzhud Breizh da vezañ kavet e pep kantved, e pep bloaz eus hec'h istor, an hevelep karantez evit ur vro, staget ouzh ar vro, eus he mibien.

Ar garantez se a vleunia e-kreiz ar stourm. Ur gwir stourm eo e gwirionez, hag a c'houlenn kalon. Darn ac'hanomp o deus lezet o buhez ennañ. Ouzhpenn stourm an diavaez, eo ret soñjal e stourm an diabarzh, krisoc'h marteze, evit trec'hiñ war e aon, e lentegezh, e leziregezh. An holl skoilhoù se na reont nemet pazennoù o kas d'ar wirionez. Kement a boan foranet ne dalv e buhez mab den nemet da dizhout ar wirionez, gwirionez ur bobl hag ur vro.

Ret eo henvel ur c'hazh ur c'hazh... Ar gudenn n'eo ket gouzout daoust hag ez omp holl tud speredek. Gout 'ouzomp vat n'omp ket. Da c'houzout daoust hag e gwir hor stourm, ne lavaran ket. Ar gudenn n'eo ket gouzout hag eñ hon eus graet atav ar pezh a oa ret (nann a dra sur). Ez eo da c'houzout hag eñ eo ret da bobl Vreizh anavezout ar wirionez.

N'heller ket treuzwiskañ ar wirionez. Bez 'en em c'houlenner penaos kinnig d'ar werin hor mennoziou-ni. Ret e vije dimp da gentañ gouzout penaos bezout. Pa venner gwiskañ ar wirionez ez eo diwar c'horre e lugerno houmañ. N'eo ket didalvoudus kaout c'hoant da dizhout an niver brasañ a dud. Ret eo neuze d'en em lezel d'ober labour boutin, dister, gwerinel.

Gant tud bev hor bro d'ober. Ret eo eta dimp bevañ ez leun ma fell dimp o zizhout. N'hell ket bevañ avat an neb n'en deus ket desket en-araok heñ ober. N'eo ket a-walc'h deskiñ. Ret eo ivez asantiñ da welout ar mennoziou o kemmañ - oc'h en em adgrouiñ emañ bepred ar vuhez. Ha c'hoant hor bije da gompren ar bed hep kemmañ ni hon-unan? Kalz aberzhioù a zigor evelse prenestr ar frankiz.

Marteze e kred da Vretoned 'zo, emsaverien anezho zoken, eo ret d'an darvoudoù mont gant o hent evit ma advleunio Breizh. Klask a reont alies un digarez d'o laoskred en o hufivreoù. Dar all a gav dezho ez eus tu da dizhout ar pal hep reveulzi bras. Bez ' e c'hourc'hennont ar peoc'h hag an ober didrouz. Netra kreñv, netra padus na vo savet hep diaesterioù. A-raok an trec'h war ar speredoù, ez eus an trec'h dre an nerzh, an eil o voutañ egile dirazañ.

Petra bennak a c'hellimp ober, e tremenimp atav e sell ar bed evel folled. Hor pal n'eo ket avat reiñ da Vreizh un dilhad alaouret. Da reiñ d'ar Vretoned un abeg da vevañ er bed-mañ ne lavaran ket. N'hon eus ket da jediñ daoust hag e teuimp a benn pe get. D'ober hon dlead hon eus.

A.T.

E K E R N E V - V E U R

Aloubet mil vloaz 'zo abaoe, trec'het, aloubet Kernev-Veur 400 vloaz 'zo, marvet ar yezh 150 vloaz 'zo, setu Kernev-Veur, peursaoznekaet (nemet an anvioù tiez, an anvioù tud hag an anvioù-lec'hioù, a-wechoù) Kernev-Veur a ya eus ar stêr Tamar en tu all da b-Plymouth betek Land's End End-Pen an Wlas. Ur vro peuzdianav eo d'ar Vreizhiz. Koulskoude ez eus tud e Kernev-Veur o stourm evit o c'heltelezh. Ar bobl, evel just, he deus doareoù diouti hec'h unan e-keñver un nebeut traoù : gouelioù parrez, boazioù, da skouer gouel an "Hobby Horse" ha koroll "Furry" e miz Mae, tantadoù Yann, ar gourennoù.

Skoazellet e vez ar boazioù-se gant tud Kefrysians Cowethasow Kernow Goth, e saozneg : The Federation of Old Cornwall Societies. An izili a fell dezho mirout an traoù kozh, met kas ivez war-raok. Ar gevredigezh-mañ he deus skourroù e pep kêriadenn koulz lavarout, 2.500 ezel a zo, hag un 30 skourr bennak. Ar Sekretour Meur a zo : Mr L.R. MOIR Pengarth, Carbis Bay, St Ives, Cornwall.

Ur gelc'hgelaouenn a embannont, heñvel ouzh "An Oaled" Taldir, gwechall. Anvet eo : OLD CORNWALL.

Koulz ha Breizh, Kernev-Veur he deus ur "Gorseth" ennañ avat, Barzhed nemetken. Ar Barth Mur (Barzh Meur) a zo bremañ Talek, anv barzhed R.G. Retallack Hooper, 16 Trevu Road, Camborne, Cornwall; nevez-anvet eo bet war-lerc'h Morton Nance (Mordon) aet da anaon ar bloaz-mañ. Hemañ a oa ivez penn-rener OLD CORNWALL. Sekretour Meur ar Gorseth a zo ur c'herneveger : Edwin CHIRGWIN (Map Melyn), Holywell Bay, New Quay, Cornwall.

Kenstrivadegoù a vez savet bep bloaz gant ar Gorseth, e saozneg hag e kerneveg. Ret-mat eo avat degemer saoznegerien da Varzhed, met al lidoù hag an ofis, dalc'het bep bloaz e derou miz Gwengolo, a zo e kerneveg penn-da-benn. Ar bloaz-mañ e voe dalc'het e Callington (Celliwick e kerneveg). Un degouezh doanuis, mantrus: Edgar Rees, ur Barzh kozh, a varvas trumm war al lec'h, o lakaat kurunenn Mordon war benn Talek! Talek, rener ur skolig, Mount Pleasant House, 16 trevu Road, Camborne, e-lec'h ma tesker istor Kernow, en-tu-hont d'ar pedennoù e kerneveg, a zegemer Breizhiz, tud deuet ha bugale a-hed ar bloaz, en e di (pezh a ra Abel Omnes e Plougouskant evit tud tramor, en hañv). Un iliz katolik a zo e-kichen, ha pep hañv e vez an tad Danteg, ur Breizhad eus Tregaranteg, da berson eno.

+
+ +

CUNTELLES KELTEK KERNOW a zo skourr Kernevek ar C'hendalc'h Keltiek, a vod izili skourroù ar C'hendalc'h etrekeltiek bep bloaz e hini pe hini eus ar c'hwec'h vro kelt. Ar bloaz-mañ e oa e Dinedin pe Edinburgh. Daou bezhig-c'hoari : ABRAM HAG ISAK, AN TRY BROCH, kanaouennoù, un danevell eus ar pezh a dremenas e Kernow, setu al lodenn dispaket e Dinedin gant 12 ezel kerneveuriat. Sekretour ar Skourr a zo : K.O. Chetwood-Aiken, Sea View Cottage, Carbis Bay, St Ives, Cornwall.

+
+ +

Ur strollad politikel a zo, o c'houlenn frankiz da Gerne-Veur da gaout ur gouarnamant e diabarzh Breizh-Veur. MEBION KERNOW eo hec'h anv. Diazezet e 1950 gant Miss Helena Charles, bremañ Mrs Guy Sanders, Prasygow, Higher Ninnis, Redruth, Cornwall; embann a ra bep bloaz Mebion Kernow un deiziadur e kerneveg.

Ar furcherien, hendraourien hag all, evel strolladoù kernevat all en em vod en Truro (Truro). Ar gêrbenn eo, ar gêr a denn da Gemper du-mañ, souezhus, iliz-veur, stêr hag all! Eno emañ ar Museum e karg the Royal Institution of Cornwall. An Aotrou Ashley Rowe, Mount Hawke, Truro, a zo brudet-mat evel hendraour hag istorour. E penn "The Friends of Brittany" emañ, ar pezh a ziskouez omp deut mat da Gerneveuriz, n'eo ket 'ta?

Skrivañ a ra e kelaouennoù saozneg ar vro. Unan a zo: "The West Briton" rak meur a gelaouenn, doare hon "Ouest France" hag hon "Télégramme" a vez lennet stank e Cornwall.

Tud an emsav avat o deus, ouzhpenn OLD CORNWALL, moulet, kelaouennouigoù roneoskrivet evel :

NEW CORNWALL, embannet gant Richard hag Ann Jenkin, Flat 1, 29 Fore Street, Totnes, Devon.

AN LEF (Ar Vouezh), e kerneveg penn da benn. Talek a zo an embanner. Dont a ra ar gelaouennig er-maez bep miz.

HEDHYU (Hiziv) a zo da zeskiñ ar yezh, roneoskrivet eo ivez, hag emañ e kerneveg evel "An Lef". Embanner: Richard Gendall, 9 Clinton Road, Redruth, Cornwall.

"Old Cornwall" he deus embannet pladennoù kernevek, nevez 'zo, ha, war-lerc'h al levr kaer "TRYSTAN HAG ISOLD", "GWRYANS AN BYS" (Krouidigezh ar Bed) gant ar saozneg e-kichen. Sekretour "Old Cornwall" a c'heller o goulenn digantai.

+
+ +

Aloubet e vez Kernow gant ar Saozon! ha neket hepken d'an hañv. Padal, tec'hout a ra Kerneviz-Veur da bell, da vont da labourat er mengleuzioù betek e Nevez-Zeland hag en Afrika an Traon. E Londrez avat o deus Kerneveuriz o "C'hêr-Vreiz" The LONDON CORNISH ASSOCIATION. Sekretour ha teñzorier: M. J.M. St Aubyn, 48 Burnham Way, Ealing, LONDON.

AN KELGH KELTEK a zo ur c'helc'h eskemm lizhiri etre ar Gelted e pep bro keltiek ha dre ar bed. Bez' e c'heller kenskrivañ evel-se en ur gas an anv da :

Miss Joan Petchey (Elowen)
17 Pydar Street TRURO Cornwall.

Kentelioù kerneveg dre c'henou a vez roet e Truru gant Miss Petchey, e Redruth gant Richard Gendall, e Pensans, e St Ia (St Ives) O Marc'harid Gourlaouen o deus zoken, evit deskiñ dre lizher, ar re a gar. He chomlec'h a zo: Miss Margaret Norris, Ivy Chimney, Scorrier, Redruth, Cornwall.

Fromus eo klevout tud o klask komz kerneveg. Frealzus eo gwelout tud yaouank o teskiñ o yezh peurgollet. War dachenn ar sportoù, gwir eo, ez eus darempredoù gant Kernev-Veur. Hor gourennerien a ya du-se. Sekretour ar "Cornish Wrestling Society" a zo an Aotrou W. Tregoning Hooper, St Anthony, Trevenaunce Road, St Agnes, Cornwall.

Breizhiz zo avat a ya da di Talek e-pad an hañv. Roomp skoazell da dud dihunet Kernow. Kouezhet int izel, e feur ar yezh dreist-holl. Na lezomp ket Breizh hor bro da goll he yezh, pe a-hend-all e c'hoarvezo evel e Kerne-Veur. Ha fellout a rafe deoc'h gwelout hor c'henvroiz peurc'hallekaet oc'h ankounac'haat betek ster anvioù ar c'hêrioù, hag o virout hepken ar brezhoneg sonnet da viken en anvioù lec'hioù hag en anvioù-tud?

KERLANN

Setu frouezh yac'h un humour breizhek disaotr. Humour kriz!
Nann, c'hoarzhañ an hini fur'o chom en distro, pell diouzh gwall-voaz
ha baderezh ar bed kollet gantañ skiant al lu.

Pep degouezh bras an amzer o tremen a vez sujet da vurutell
ar spered leskidig-se a dant hag a c'hwenn.

Un hengoun eo, ha n'emañ ket o vont da goll. Gwell a se!
Piv en deus laret : Marv eo an Erminig "a c'harme ar
Merc'her Erm yaouank en arfleu, en amzer ma notae unan eus pennober-
ennoù an ijin poblel-se, "Pevar Mab Emon" - ha Tiercelin a eure gwazo-
niezh d'an nac'her yaouank.

An erminig o furikat en ur ober goap c'hwerv, mistr, na dall
na sot, a vev brepred.

Amañ e vo kavet an ateb dantus ha leun a vadegezh d'un ne-
vezinti diskiant.

Paris, ar gêr vras, kollet ganti skiant an den, dic'houzvez
eus al lu, an enep-den, a zihun ijin-goap, ha n'eo ket houperig, ur
c'haner yaouank a Vro-Wened n'en deus ket tizhet c'hoazh e ugent vloaz
hag a laka da dridal er vuhez koroll ur bed breizhek, gant e ventad
dioutañ, ha sevenet gantañ leunder e ene. O vont war beurheñvelaat
ouzh ar gorriganed hag enkelerien noz atahinus all met leun-barr ivez,
ha puilh, a zenelezh.

AR GOURC'HI

Er blé paset, ur jeneral (2 huéh) Hag e ouié, ean, e nuial, Drip é drap é lanlir Hag e ouié, ean, e nuial, Drip é drap é lanla.	"Me ho kompren ol Fransizion A Baris, Bourdel, pé Roahon" Pep leh hueller "mon jeneral" Pé de gonzal pé de huchal.
E zou deuit evit adsañet, Sañet er vro er Halleued.	Get é ziurréh hir ha ihuel Ban zou 'el ur melin aùel
Ur pikol den, ha bras elsé Ean e zou un den mat, sur é!	Met adran é gein, petra é? Nag ur marmouz chetu Debré.
Er bed rah, ennou grédé; "Chetu er Salver, en Doué!"	Pe mon jeneral e lar "Ia!" Debré e respont "nan, ne pas"
Mes ur paotr farsus, a mem bro En des laret d'er ré tro (a)-dro	Pebeh glahar, pebeh ankin! Nag a drouz aveit nitra-kin!
"Aveit er ré a Giberen Eit kàuet tour-tan mui a boèn	Er Vretoned zou tud fier Mes n'ind de ket gal "a-part-entiere"
Mon jeneral e kemeret Ur goleu ar é ben laket	En "otodeterminasion" Leh ebet aveit er breton.
Farot e zou "chtou" bro Kerné U, rak ind des er krah marsé!	Er Fransizion 'el kouionned Ne larant grik ne larant ket.
Met hui, get hou neùé tour-tan Er farotan e vou breman"	Met dihoallit d'er Vretonned!!

Savet get ur paotr bro Gwened, mor-hañet ER GOAPOUR.

" KUIT GANT AN IWERZHONEG
DRE REDI "

En ul lodenn vat eus skolioù kentañ Iwerzhon e vez graet gant an iwerzhoneg evit ar c'henteliañ adalek an eil bloavezh-skol. Difennerien an iwerzhoneg a rank en em brientiñ avat, da stourm evit mirout ar roll-se d'ar yezh. Kreñvoc'h-kreñv e sav klemmerien o mouezh evit goulenn ma vo kenteliet ar vugale en o yezh c'henidik -ar saozneg evit an darn vrasañ -, ha ma vo desket iwerzhoneg evel un danvez-kelenn hepmuiken. Alies e klever displegañ ar menoz zoken, e rafe an iwerzhoneg gwelloc'h roud ma vije lezet ar gefridi etre daouarn urzhiadoù prevez, "rez-youlek" : evelse e oa arak 1921 ha neuze e veze gred e-touez an dud evit mont d'ar skolioù-nnoz. Bremañ avat e reer enebourien eus an holl dud yaouank a c'hwit en o arnodennoù en abeg d'an amproennoù en iwerzhoneg. An abegerien-mañ ne lavaront netra a-zivout niver kalz brasoc'h ar re a dremen an aprouennoù-se. Renerien-skol, ar re brotestant zoken, a anzav e c'hell ur bugel deskiñ iwerzhoneg mat a-walc'h, ma 'z eo barrek evit an aprouennoù all. N'eus aze nemet digarezioù lezireien pe gweerien.

Ar glemmerien a damall d'ar yezh (!) bezañ pennkaoz ma tivro kalz tud yaouank - evel pa vije muioc'h a bostoù da gaout paneveti! An iwerzhoneg hervezo a zo dalc'het er skolioù gant ur rummad tud hag a denn gonid dioutañ : n'em eus kejet-me gant julod iwerzhonegour ebet koulskoude - pa vez goulennet piv ar gorbinerien ne vez ket respontet! Goulenn a reer un hollvouezhiadeg - emeur en un demokratiezh, 'ket gwir

Ar muiañ beg-arak er pismigerezh eo ar gelaouenn "Irish Times" betek-hen. Eus an teir c'helaouenn bemdeziek eo-hi an hini "dieupañ", distag diouzh ar c'hostezennoù politikel, nemet ec'h argreder-start ez eo a-du gant distreiñ d'ar C'homonwealth, pe d'ar Rouantelezh Unanet. An hini speredekañ eo, gwellañ-kelaouet, uhelañ he live, a c'heller lavarout. He fennskriver ne vank ket un digarez evit skeiñ ouzh ar mennad adober eus an iwerzhoneg yezh an holl. Mat e vefe evel-just mirout ar "medium" er Gouzelva - ur seurt mirdir indiat ma ve paeet e anezerien da ouezelegiñ?? E-tal lizhiri dizanv a-enep, e vez embannet en I.T. lod lizhiri a-du. Embann a reer ivez kemennadurioù Sinn Féin! Ur vertuz eo bezañ kerreizh.

Betekhen n'en doa kredet strollad politikel ebet reiñ mouezh da enebourien an advuhezekaad. An iwerzhoneg a zo "un herezh broadel, prizius". An holl a ro dezhañ un tammig servij-diweuz - ne da ket ar servij betek komz iwerzhoneg en Dáil avat - ober a rafe an den ar sod anezhañ e-unan. Er gelaouenn bemdeziek ar muiañ a-du e vez ur c'horn-an-iwerzhoneg, un tammig hiroc'h eget en Ouest-Eclair gwechall. Kement gouarnamant a ro un darnig eus an arc'hantroll evit seveniñ ar mennad - gwall nebeut. Hevlene koulz ha warlene en deus aspedet kadoriad ar c'hlub-levrioù iwerzhonek ar gouarnamant da baeañ embannerezh al levrioù-se, ahendall ne zeuy ket ar c'hlub a-benn. Aze e weler ez eus ezhomme ur Stad evit adsevel ur yezh, met n'eo ket a-walc'h : arabat eo e vefe "nervennoù" ar stourm, an arc'hant, e dalc'h moc'hoilhed na reont forzh gant sevenadurezh keltiek. Ar re-se, a c'heller krediñ, a zo prest da asantiñ d'un aluzenig evit ma vo peoc'h digant an drabaserien. Ahendall n'eus nemet lezel ar berenn da bezhel-laot goustadik!

De Valera a gomz iwerzhoneg bep tro ma kav tu. Met dilezet en deus bremañ renerezh FIANNA Fáil, hag e warlerc'hiad, S. Lemass, evitañ da vezañ bet en taol, dija e 1916, a zo prederiet kalz muioc'h gant an arboellerezh eget gant kudennoù sevenadurel. Ne gav ket din e oar iwerzhoneg. Er gostezenn all, liespenn evel ma 'z eo, e oa R. O Maolchathaigh an hini fealañ d'ar yezh. Roet en deus e zilez bremañ. Ur rummad Fine Gael yaouank en deus kroget da embann ur gelaouenn-studi, National Observer, "evit degas gwad nevez er politikerezh ha trec'hii da arvelloù ha rannidigezhioù eus amzer ar Feur Englev, tabutoù diamzeriet ha didalvoudekaet, evit klask adsteudiñ an nerzhioù politikel hervez ezhommoù ar pred-mañ". Ar rummad-se, en o fenn mab Costello, a glask divroudañ Unionisted ar 6 Kontelezh en ur ginnig ma vo anavezet ez eus ur speurenn na c'hellor diskar nemet dre lezel anezhi sioul! Lezel ar berenn da bezhellaat, adarre.

En ur c'hendalc'h eus kostezenn al Labour he deus komzet merc'h al Larkin brudet a-du gant prientiñ bugale ar skolioù evit an endro - saoznek - ma vevint ennañ. Anavezout a reer ivez, dre empleg, e ranko an darn vrasañ eus an dud yaouank divroañ d'ar broioù saozneger ken gwazh ha biskoazh. Ar strollad-se, daoust d'e anv, a anzav neuze n'eo ket gouest da zirouestlañ kudenn an DILABOUR en Iwerzhon - nemet en ur lezel ar vro da zidudañ. Petra emañ o c'hortoz evit distrollañ 'ta?

Nevez 'zo c'hoazh e voe aozet ur vodadeg vras gant strollad nevez an National-Demokrated evit breutaat an iwerzhoneg dre redi. Galvet e voe Dulenniz gant uhelgomzerioù, tri pe bevar c'hant den a zeuas. Komz a reas Noel Brown, Mac Quillan hag ur c'hannad-Dáil all, hag ar c'helaouennoù pemdeziek a reas meneg eus eneberezh a-berzh selaouerien 'voe. Dre Inniu holl-iwerzhonek sizhuniek eo ec'h ouzer penaos e troas ar vodadeg d'un drouziwez evit an Demokrated "vroadel". Micherourien ha tud na ouzont ket iwerzhoneg a zis-klêrias o lorc'h gant o bugale gouest da gomz ar yezh, hag a erbedas d'ar bolitikerien emellout ouzh kudenn an dilabour e-lec'h dont da zistrujañ ar pezh a zo bet hag a vez graet evit adsevel ar vroad. Petra eo 35 vloaz e buhez ur yezh ? Ar saozneg en doa kemeret kantvedoù evit en em ledañ war Iwerzhon. Ken taer ec'h enebas ar selaouerien ma ne c'hellas ket an aozerien lakaat ar vreatadenn d'ar mouezhiañ.

Hag Inniu a respont d'ar re a c'houlenn un hollvouezhiadeg diwarbenn an iwerzhoneg, en ur nac'h he defe ur remziad ar gwir da lemel digant ar remziadoù da zont herezh ar yezh vroadel. Ret eo reiñ tu d'an holl Iwerzhoniz da ober gant o yezh, hag e-sell da se e rank bezañ kelennet a-zevri. Ur yezh a zo ur mad speredel, ha madoù speredel ne vez ket divizet o dazoned dre hollvouezhiadegoù. Ar muiañniver ne c'hell ket lavarout mar deo reih pe nann diwall ur yezh, kennebeut ma ne c'hell ket divizout diwarbenn kudennoù relijiel. An hentennoù dibabet evit adsevel ar yezh a c'hell bout burutellet ha kemmet. Hogen lakaat buhez ar yezh d'ar mouezhiañ a zo marc'hata diwarbenn talvoudoù-spered.

Ar vodadeg-se a ziskouez ez eus muioc'h a spered-stourm gant difennourien an iwerzhoneg eget e-touez e damallerien. Ha se eo a gont. An darn vrasañ eus an dud a zo lezirek, n'int ket a-enep, n'int ket a-du, ne ouzont ket petra 'fell dezho. Reizh eo e trec'hfe an nerzh-spered war an niverioù.

Keit ha ma chom ur seurt nerzh gant difennourien an iwerzhoneg, ne grede ket o enebourien c'halloudus lemel o gweenn. Se a oar ar Gwir-Ouzeled.

°- Hiziv e lennan war ar gazetenn ez eo bet dieubet an Dr Hendrikk Helias. Ar gazetenn a lavar diwar e benn, evel just, e oa ur "c'henlabourer" - evel forzh peseurt charkuter bet o werzhañ moc'h d'an Alamanted. An Dr Helias a zo bet rener meur strollad broadel Flandrez. Evit-se eo bet barnet d'ar marv. Evit-se en deus tremenet pemzek bloavezh en toull-bac'h. Anavezout a rae kudenn Vreizh. Laouen omp gant trec'h Flandreziz bet o stourm keit amzer evit e zieubidigezh.

°- Meur a gentel a c'heller tennañ eus an darvoudoù e Brest. Ar gentel kentañ eo e c'hell tud Vreizh bezañ dedennet gant kudenn Vreizh! Ouzhpenn mil den a oa deut da selaou prezegennerien ar MOB. Ha, tra pouezus ivez, ouzhpenn 50 den - o bagad-stourm brestad en e bezh - a oa bet kaset gant ar Gomunisted da virout outo da selaou pe da nebeutañ da glevout.

Met kentelioù all a zo da dennañ ivez. Kalz re a "furnez" en deus diskouezet an MOB e-keñver kudennoù bras ar mare. Mut eo chomet diwar-benn ar c'houlennadeg vras. Mut e chom diwar-benn kudenn an Algeri. O tiskouez sklaer, hag eeun, eus peseurt tu emañ ar vrogarourien vreizhat, en defe an MOB lakaet diaes a-walc'h d'ar Gomunisted tagañ anezhañ evel m'o deus taget. Displijet e vefe bet Bretoned 'zo? Marteze. Met, siwazh, n'eus ket tu da stourm en ur blijout d'an holl. Ha, forzh penaos, ret eo d'an holl Vretoned gouzout n'eus tra ebet da c'hortoz digant ar C'hallaoued a zo a-du gant gallekaat an Algeri. Pezh na vir ket ouzhin, a-hend-all, da gompren ez eo ar Gomunisted, bremañ, heñvel a-walc'h ouzh o enebourien eus an tu dehou pellañ evit pezh a sell ouzh Breizh, pe, ma kavit gwelloc'h, evit pezh a sell ouzh an dreistvroadelouriezh c'hall : n'eo ket hep abeg ez eo bet tennet diganto adaozidigezh ar strollad komunist aljeriat evit hen fiziout er Strollad Komunist Italiat!

Ur gentel all c'hoazh : ret e vo d'ar MOB kaout ur bagad paotred yaouank embreget da stourm evit "gwareziñ" e vodadegoù.

A-hend-all n'eo ket displijus gwelout ez eo bet anavezet ar MOB gant an holl evel ur strollad "otonomist" : sklaeroc'h an traoù evel-hen.

°- Un nebeut tud, "broadelourien eus an amzer wechall", ha kemmet ganto tu d'o chupenn abaoe, a zo deut d'ar vodadeg evit ar blijadur da welout "les Breiz Atao se faire casser la gueule". Siwazh evito, n'eo ket bet echu ar c'horida gant marv an toro.

°- Ur pennad mat diwar dorn Maodez Glanndour a oa e niverenn eil-diwezhañ Al Liamm: "Lennegezh evit ar Bobl". Lennit anezhañ. Talvezout a ra ar boan. Gouzout a raer nag a damalloù a zo bet taolet ouzh Al Liamm, kelaouenn "skrivet en ul langach artifisiel kondaonet gant ar Vretoned pur", evel ma skrive Jakez Riou. An Ac. Scité, ar geriadurour evel ma ouzer, en deus zoken dizoloet ur rannyezh nevez "yezh al Liamm", a vefe, hervezañ, da skouer, skrivet enni ar gelaouenn Hor Yezh. Ar gwir vrezhoneg, ar brezhoneg bev, ar brezhoneg yac'h gouez d'an Telegramme hag a yae fonnus gant an embannerezh, a oa da

vezañ kavet e Brud. Hag e Bleun-Brug evel just. Ma, ne seblant ket ar bobl bezañ bet plijet kalz gant ar yezh skrivet evito gant Bleun-Brug ha gant Brud. Bleun-Brug, war a glevan, ne vez ket mui embannet, hag e lec'h a vo kemeret gant ur gelaouenn a vo al lodenn vrasañ anezhi e galleg - yezh ar bobl? - ha Brud war a glevan ivez, he deus ranket nevez zo ober un amprest bras a-walc'h digant Kendalc'h. Trist eo gwelout kazetennoù brezhonek o vervel hag o tizeriañ. Met ret eo tennañ ar gentel. Perak eo marv Cahiers du Bleun-Brug ? Perak emañ Bleun-Brug o vont da get ? Perak ne zeu ket Ar Falz er-maez ez-ingal? Gant argant bras an F.C.B. a-dreñv dezho? Peogwir e vank dezho ar pep retañ : retoc'h eget flourded ar yezh, retoc'h eget an ijin, an arz, ar blijusted ha pep tra all : tan ar vrogarantez. Ar vroadelouriezh.

°- Plijout a ra din lenn ez eus bet embannet er bloaz tremenet 29 pladenn brezhonek. Daoust hag e reont berzh? N'ouzon ket : ken un den akuit war vicher ar gwerzhañ pladennoù e Breizh a c'hellfe lavarout. Er mare-mañ eus ar bloaz, avat, em eus bet tro, ur wech muioc'h, da welout petra a blij d'ar yaouankiz -d'ar yaouankiz-se ha na soñj ket e Breizh bremañ marteze, met a zo koulskoude hor yaouankiz - hag aon am eus - karout a rafen faziañ - n'hon eus ket kalz a chañs, gant hor pladennoù brezhonek, a-enep d'ar pladennoù gall pe amerikanek.

Evel just, aes e vo respont din : brav eo deoc'h komz, met peseurt berzh a rit-c'hwi hag ho mignoned gant ho levrioù brezhonek ? Disheñvel eo ar gudenn. Lenn ul levr brezhonek a zo dic'hallus evit an holl Vretoned nemet ur miliad marteze, peogwir e teuont er-maez eus ar skol ken divarrek da lenn ha da skrivañ o yezh ha m'az int da lenn ha da skrivañ japaneg. Gant ar pladennoù n'eus ket mui ar seurt kudenn. N'eus ket zoken kudenn ar c'hompren : miliadoù tud a bren pladennoù Mahalia Jackson pe The Platters, pe Bessie Smith, hep kompren netra er pezh a vez kanet.

Soñj am eus eus ar reuz hag ar freuzh a voe, e lec'hioù 'zo, en deiz ma embannis, ur pennadig amzer zo, e kaven fall ur pladenn embannet gant ul laz-kanañ a zo (ur pladenn hag a gavan fall atav a-hend-all). Abaoe en deus al laz-kanañ-se embannet pladennoù all hag a zo, kalz anezho, kant, mil gwech gwelloc'h, pezh am eus plijadur o skrivañ. Met daoust da se e kredan, hag e soñj din, hep drougiezh ebet, e tleer hel lavarout, e chom hor pladennoù, dre vras, kalz izeloc'h, e-keñver micher ar c'han, ar seniñ hag an enskrivañ, eget an darn vrasañ eus an embannadurioù europat all pe amerikan.

A-hend-all, n'eo ket en o zu micherel emañ an tech brasañ eus lod anezho : en o danvez e-unan ne lavaran ket. Peurliesañ int diamzeret a-grenn. Kozh int. Mat e oant, ur c'hantved a zo, en ur gumuniezh kouerien : ne c'hellont ket talvezout, en ugentved kantved, evit tud hag a zo, hag a vo muioc'h-mui, tud eus ar c'hêrioù. N'eus nemet en ur c'heñver e c'hellfe ar c'hanaouennoù-se hor fromañ c'hoazh : hini ar garantez. Met daoust ha n'eo ket er c'heñver-se, e gwir, ez int ar muiañ diamzeret ?

Arabat krediñ e vefen a-enep d'ar c'hanaouennoù kozh. Hag arabat krediñ, p'emaon a-enep kanaouennoù kozh a zo, ez on a-enep dezho peogwir int kanaouennoù kozh. Plijout a ra din kenañ selaou Zaig Monjarret o kanañ En Hani e garan evel ma plij din klevout Sokhtchinsky o kanañ War ar Volga pe Paul Robeson o kanañ Les Quatre Generales. Met ar pezh a zo fall eo kaout kanaouennoù kozh hepken.

Arabat disoñjal emaomp, evit brudañ ar c'hanaouennoù brezhonek, e kevezerezh gant kanaouennoù gallek a-vremañ. Ma, sellomp ouzh ur c'hanour gall hag a zo ar vrud gantañ bremañ : Brassens. N'eo ket diaes kompren perak e plij kement : en e ganaouennoù, ul lod mat anezho da nebutañ, e klevo ar re yaouank evel un heklev eus ar pezh a gan o c'halon : ar c'hoant d'ar garantez, ar c'hoant d'en em sevel a e-nep ar sotoni strizh, a-enep d'ar boazioù bourc'hiz, a-enep da wask ar bilbouserezh-dereat. Un dalvoudegezh kevredigezhel en deus Brassens, un dalvoudegezh bremañ-el. Tremen a raio e vrud, evel just : se a zo tonkadur ar vuhez. Met chom a raio evel merk, evel heklev ur mare, evel ma chom "Le Temps des Cerises" evel heklev ur mare (gall) all. Daoust ha kalz eus hor c'hanaouennoù o deus un dalvoudegezh a-vremañ ?

Amañ, avat, e rankan chom a-sav. Eo. Lod eus hor c'hanaouennoù kozh o deus un dalvoudegezh a-vremañ : ar c'hanaouennoù a vrogarantez. Hag etre an daou vrezel ez eus bet savet kanaouennoù nevez gant un dalvoudegezh modern : ar c'hanaouennoù a vrogarantez adarre. Ar re-se a c'hell c'hoazh fromañ, dihunif - ouzhpenn plijout. Ha setu dres perak, arabat mont da glask pelloc'h, setu dres perak e vez stourmet kement a-enep dezho gant ar re a zo o klask derc'hel an emsav war hentoù ar C'hallaoued : kanaouennoù brogar ar Barzhaz Breizh a zo "faoz", hag ar re savet a-raok 1945 a zo, ec'h!, war donioù keltiek pe germanek.

Gwir abeg an enebiezh, n'ho pet ket aon, a zo boutin d'an daou rumm : kanañ a reont Breizh digabestr. Ha gwasoc'h a zo : hen kanañ a reont gant berzh-vat ! Dirisklusoc'h eo d'ar Vretoned kaout hepken "An durzhunell" pe "Ar Serjant-Major" da ganañ.

Evel just, ar pal n'eo ket treiñ Brassens pe Edith Piaf e brezhoneg ! Ar pal a zo sevel e brezhoneg traoù a-vremañ hag a respont da demz-spered ar Vretoned, d'o ezhommoù, d'o c'hoantoù, evel ma respont Brassens hag Edith Piaf da ezhommoù ar C'hallaoued.

Nac'h braventez ar sonerezh breizhat ? Nag ur sotoni e vefe ! Arabat treuzkemer an ton evit ar c'homzoù avat ! Hag arabat disoñjal ivez ez eo ar vuhez sevenadurel ur c'hemm-eskemm dibaouez : taolomp ur sell war ar pezh a ra Kembreiz Sir Fflint, o sevel e kembraeg kanaouennoù doare jazz da zistreiñ ar re yaouank diouzh ar c'hanaouennoù saoz-amerikanek ; taolomp ur sell ivez war ar pezh o deus graet Sidney Bechet ha Claude Luter evit tonioù zo eus kreisteiz Bro-C'hall ; ha dalc'homp hon daoulagad digor war ar strivoù a zo bet graet hag a vo graet c'hoazh war an hent-se e Breizh.

°- Peogwir e komzan eus kanaouennoù daoust ha ne vefe ket poent en em unaniñ adarre, an holl ac'hanomp, en-dro d'ar Bro Gozh evel m'eo bet skrivet gant Taldir ? En-dro d'ar werzenn-se : RA VEZO DIGABESTR, MA BRO ! ? N'eus tra da lavarout ouzhpenn goude studiaden skedus P. Keraod, e-barzh Sturier Bleimor, war ar poent-se. Ret eo lezel a-gostez an drevezadur gwan a zo bet klasket hen brudañ abaoe un nebeut bloavezhioù.


°- Goude m'emañ an holl o klask en em zistagañ diouto, e tle bezañ bet kennerzhet ar C'hallaoued o welout pegen bras emañ ar garantez outo en enezenn Wallis. War an 2.261 Poluneziad o chom en enezenn, 2.261, rik-ha-rik, o deus goulennet bezañ staget ouzh Bro-C'hall. Un digoll evit ar Mali!!

°- O komz eus ar Mali. An Ao. Houphouet-Boigny a zo, war a lavarer, displejet-bras gant ar pezh a zo bet roet d'an Ao. Modibo Keita : eñ en doa displeget e fiziañs er Gumuniezh evel ma oa bet divizet da gentañ, ha setu de Gaulle e-unan o kemm doare ar Gumuniezh dre reiñ ar frankiz d'ar Mali, pe kentoc'h dre lezel ar Mali d'he c'hemer. Ar paour-kaezh Ao. Houphouet n'en deus ket a chañs : bez 'e oa bet en embrougadeg vras eus an Nasion d'ar Republik da vare an 13 a viz Mae hag, evit en em zigoll da vezañ bet "touellet" gant tud a bede anezhañ da stourm pa ne felle ket dezho stourm tamm ebet e oa....
 ...aet diouzhtu e-barzh gouarnamant ar jeneral. Penaos en em zigollo bremañ an Ao. Houphouet ?

E gwirionez, un disterig arvarus eo bezañ mignon d'ar C'hallaoued. An Trede Reich en deus kollet ar brezel en deiz m'en deus sinet an arsav-brezel ha kroget da genlabourat gant Bro-C'hall. Ar Gomonistiezh a zo aet war-raok en Indez-Sina keit ha m'eo bet ar C'hallaoued e-barzh, hag an Amerikaned o rankout chom da sellout ouzh kement-se. Gant ar C'hallaoued dreist-holl e vez stourmet a-enep d'an Europa kevredet, d'un arme europat savet gant skoazell ar re nemeto a c'hell reiñ skoazell, ar C'hermaned. Ha bremañ, gant he foli-tikerezh en Aljeria, emañ Bro-C'hall o sikour bruderezh ar Rusianed er broioù nemeto a zo bet diaes d'ar Gomonistiezh en em ziazezañ enno betek-hen, ar broioù muzulmat. Hag, e-keit-se, an Amerikaned o reiñ arc'hant, armoù ha me oar!

°- Kelou plijus : unan eus pezhioù c'hoari Jarl Priel, Ar Spontailh, troet en iwerzhoneg gant Roisin Ni Shéaha, dindan an anv Deora na Sireachta, en deus graet berzh, en Damer Theatre, e Dulenn, e miz Kerzu. Gant sikour Gael-Linn eo bet aozet an abadenn. Un enor d'ar brezhoneg koulz ha d'hor mignon kozh.

P.D.



LABOUR Etudes Travailleurs - Dispac'h

Dépôt Légal 4° trimestre 1959

Directeur-Gérant Gérard Toublanc
2 rue de la Herse, SAINT-MALO (I. et V.)

Tirage 500 exemplaires

Imprimerie spéciale de Labour
Publication inscrite à la commission paritaire des
papiers de presse sous le N° 36.027

